

RIS – hentad divyezhek–

Un ugent skolaer bennak zo deuet betek Karaez evit eskemm war ar c'helenn en div yezh hag ar c'hudennoù a c'hell bezañ kavet er skol mañ skol.

Un emvod eskemm eo ar « RIS » e lec'h e c'hell izili oberiant ar SNUipp lâroust ar pezh a reont evit kas an traoù war-raok war ar pemdez hag ar skolaerien lâroust penaos e tremen an traoù war an dachenn hag ar pezh emaint o c'hortoz ouzh ar SNUipp. Dedennet bras eo bet an holl berzhidi ha sur mat e vo aozet ur « RIS » all a-benn an trede trimiziad.

An diviz	Penaos mont war-raok ?
<p>An diouer a zoujañs</p> <ul style="list-style-type: none"> - er skol : pouezus kenañ eo renerezh ar skol. El lec'hioù zo n 'eo ket gwelet ar skolaerien divyezhek e-giz skolaerien e-giz ar re all - gant an IENed - dre vras ne vez ket kelaouet ar skolaerien war an hentad divyezhek. Diwar an diouer a gelaouiñ e sav kudennoù. - An holl skolaerien divyezhek a soñj dezho eo diaesoc'h da gelenn en div yezh (gwiriektaet gant ar re o deus cheñchet hentad) daoust dezho bezañ mennet. <p>Bep bloaz e chom postoù vak ha lod all dilezet.</p>	<ul style="list-style-type: none"> - kinnig an hentad diyehzek e-pad stummadur an holl renerien - pouezañ e-pad emvodoù an distro evit ma vefe kinniget an hentad divyezhek da dud ar vugale gant ar renerien - Sevel ur prantad stummadur evit ar M1/M2 - goulenn digant ar velestradurezh un doare kehentiñ « pozitivel » <p><i>Penaos e c'hellfe ar sindikad anavezout diaesamantoù ar ar vicher « skolaer divyezhek » ?</i></p>
<p>Kudennoù an enskrivadurioù</p> <ul style="list-style-type: none"> - Ne vez ket kinniget bep taol an daou hentad da dud ar vugale - Chom a ra diaes an darempredoù etre ar c'humunioù evit paeañ fredoù ar skolidi divyezhek 	<ul style="list-style-type: none"> - pannelloù ha skritelloù evit kinnig ar c'hlasoù divyezhek - cheñch an doare da arc'hantaouiñ ar c'hlasoù divyezhek gant kemmoù el lezenn.
<p>Kevezerezh an hentadoù all</p> <ul style="list-style-type: none"> - An diouer a bostoù en deskadurezh publik dre vras a zegas kevezerezh etre an hentadoù, ha gwashoc'h eo c'hoazh, pa vez anv da zigeriñ ur c'hlasad pe ur skol. - Ma ne gav ket e blas an hentad divyezhek er skol bublik e kavo en hentadoù all . 	<ul style="list-style-type: none"> - Arabat serriñ ur post unyezhek pa vez digoret unan diyehzek. Gwelloc'h e vefe gortoz ur bloavezh da welout. <p><i>Ma vefe trawalc'h a-bostoù evit an holl, ne vefe ket eus an emgann se.</i></p>
<p>Al luskoù nevez</p> <ul style="list-style-type: none"> - Er c'humunioù zo eo aet kuit skolidi d'ar skolioù all (skolioù privez, diwan) peogwir n'eo ket bet lakaet en « TAP » e pleustr er skolioù publik. 	<p>Gwir e c'hell bezañ koulz evit an hentad unyezhek hag an hentad divyezhek.</p>
<p>Binvioù TES</p> <p>N'ez eus ket trawalc'h a levrioù troet e brezhoneg evit ma c'hellfe Yann skolaer dibab e hentenn. (skouer ar matematik)</p>	<p>Mat e vefe goulenn o ali gant ar skolaerien.</p>
<p>Kalite an hentad divyezhek</p> <p>Live A2 d'an nebeutañ eo al live goulennet e fin ar CM2 (live B1 'vefe gwelloc'h c'hoazh)</p> <p>Penaos lakaat ar skolidi da vezañ divyezhek pa 'z eus kement se a vugale er c'hlasoù ?</p> <p>Evit ma vefe tizhet ar palioù e rank bezañ kemer e kont mont en-dro ar c'helenn divyezhek er gartenn skol.</p>	<p>Dezverkoù an divyezhegezh a rank bezañ un elfenn ouzh ar CT. Pal pedagogel ar c'hlasoù divyezhek e-keñver ar yezhoù a rank bezañ anavezet.</p> <p><i>Goulenn a ra ar SNUipp ne vefe ket muioc'h a 15 bugel e klasad ar re vihan.</i></p> <p><i>Gant « ur mestr muioc'h eget ar c'hlasoù » e vefe posupl da sevel strolladoù bihan da zeskiñ gwelloc'h ar yezhoù.</i></p>
<p>Stummadurioù kentañ ha diabouez</p> <p>A-du eo an holl skolaerien evit lâroust o deus ezhomm da eskemm e brezhoneg war o micher.</p>	<p>Dre Majister ez eo posupl da sevel stummadurioù. Stajoù departemant pe etredepartemant a zo da vezañ krouet.</p>
<p>An ATSEMed hag An AVSed</p> <p>Liesseurt eo. Emaomp o vont war-gil un tamm. Erlec'hiet eo an Atsmed divyezhek a ya war o leve gant lod yaouank n'int ket brezhonegerien-ezed. N'ez eus ket kalz a AVSed divyezhek padal eo pouezus kenañ evit ur bugel diaes da zeskiñ gantañ chom gant yezh-kelenn an danvez.</p>	<p>Ar strollegezhioù lec'hel a rank goulenn ar barredigezh war ar brezhoneg</p>
<p>Kuzulioù skol-skolajoù : gant al lezenn nevez e vo posupl da grouiñ ur gwir liamm etre ar skolioù hag ar skolajoù.</p>	<p>Ne vo ket aes gant kement a skolioù evit ur skolaj...</p>

